

Dizano. Chanson nevez Eur himiad

Bet savet e dibenn an XIX^{ved} kantved. Modernnaet eo bet an doare-skriva. Red eo gouzoud ar galleg evid kompren gerioù 'zo ;

*Kompozet war sujed eur himiad etre daou zen yaouank euz a eskopti Treger
War eun ton divertisant*

Ar gwaz

Bonjour deoh, va Mestrez, deut on c'hoaz d'ho kweled ;
Dioh ma leverot din, em rentot glaharet :
C'hwi 'oar a-bell-amzer pegeemnt ho karan ;
Merket em-eus hen deoh n'en-de' ket a-vremañ.

Demeuz eur hostez all hoh-eus sur va zromplet,
Ma ne deut hoh-unan eun nebeud d'am hared ;
Seblantoud a ree din ne oah ket droug-kontant
M'en em gavem eun tu asamblez o parlant.

Bre zo ganeom on-daou aliez prepoziou,
Testez vad oh ane¹, dalhit mad d'ho komzou.
Me 'vo fidel d'am ger, dalhit mad ouz hoh hini ;
An amzer a avañs, poent e' deom dimezi.

Ho pizaj, ho poltred, ho teod, ho taoulagad,
Ho furnez, ho tousder, ho komzou deread,
O-deus greet em spered ker braz impresion,
Mar deut d'am dilezel, e ranno va halon.

N'oufen petra d'ober, red eo kleved bremañ
An are definitif², va setañs diwezañ :
Gwell eo mervel buan eged boud lañgisant,
Bepred an esperañs, bepred an nehamant.

Roit din, va Mesterz, pontamant va aret³,
Ha soñjit kent e rei em-eus kalz ho karet ;
Koñsultit ho kalon, soñjit n'ez eus hini
Ho kar mui egedon, ha deut d'am hoñsoli.

Ar plah

Doned d'ho koñsoli a houlit, va mignon.
Ezomm am-eus ivez a goñsolasion :
Ganeoh e houlennan ar hars a houlennet⁴,

¹ ane : aneze.

² An are definitif : galleg.

³ aret : galleg.

Ezomm on-eus on-daou da veza koñsolet.

Ho setañs a houlennit, plijet gand va Jezuz
E tepantfe ouzin e rei deoh grasiuz !
Serten on ho-pije en ho tiskresion,
Agreabl deom on-daou en dezir or halon.

Ma vijen-me mestrez demeuz va bolonte'
Me oa⁵ deoh ha c'hwi din heb neb difikulte :
Me 'm-eus ho karet mad hag ho kar a-vremañ,
Rann 'ra va halon oh en em dispartiañ⁶.

Mez kent dispartia, me ho ped, selaouet⁷
Ha grit refleksion war va ger eur momed,
Doue a hourhemenn senti oh tad ha mamm,
Hag obeisa de⁸ evid beza divlamm.

Tud a zalh d'or heñver plas an Aotrou Doue,
Obeisom, p'on-eus digante ar vuhe' ;
Kalz a boan o-desu bet o tond d'on elevi,
N'e' ket just heb o grasvad doned da zimezi.

O mouez 'zo evidom serten mouez eun Doue,
Biken netra ne ran heb kaved o hoñje :
Greet em-eus va fosubl evid o renta kontant,
Greet hoh-eus hoh hini, ha ne dint ket asant.

Me 'gred bremañ serten ne dom ket destinet
Da veza priejou asamblez uniset ;
Doue 'ra deom entent e vouez dre o genou,
Biken ne drañsgresan sur e hourhemennou.

Ma reen heb o grasvad eru marhad paduz,
Em-bez aon goude-ze na ven-me maleüruz ;
Va houstiañs goude a rebeche⁹ din-me
Em bez ho kemered heb koñje va ligne'.

Komzet 'm-eus ha greet komz en or faveur oute,
Ha biskoaz 'm-eus gallet o zrei war an tu-ze ;

⁴ houlennet : houlennit.

⁵ Me oa : me 'vefe.

⁶ dispartiañ : ne ra ket bepred ar hemmadur D/Z.

⁷ selaouet : selaouit.

⁸ de : deze.

⁹ rebeche : rebechfe.

Kredit en asurañs on-me ket braz fached
Ha ma oufeh beza, pa ne dint distroet.

Kement am-eus greet toud a zo bet inutil,
Dimezi heb o hoñje n'en-de' ket difisil ;
Mez hennez 'zo eun dra ha na rin biken,
War gement-se jamez ne dorrin o lezenn.

Ar gwaz

Et bien¹⁰, va mestrez, houmañ 'zo kalonad,
A goust eun aboñdañs d'elou d'am daoulagad.
Va halon gand glahar a zo kazi rannet :
Houmañ 'zo kalonad, goude beza karet !

Ar plah

¹⁰ Et bien : galleg.